

# CHANSON NEVEZ

Composet gant eun den yaouanc, eus a bares Bricc, voar sujet e Vestres  
pehini e c'har gant un amitie barfet.

Var un ton nevez.

Chilaouit eur chanson, so nevez composet,  
Pehini a savet, e mil eiz cant naontec;  
Savet gant eun den yaouanc, er blaves-man present,  
En deus laquet e speret, da re garout e c'hoant.

Nac ebars e Bricc, er blaves-man present,  
Un dra melconius, etre daou zen yaouanc,  
Perè dre amitie, o devoa desirèt  
En eil d'eguile, vezen bet daou bried.

Evel d'or bar avel, eruas promptamant;  
Bars er proposiou caër, voa bet deut chanchamant,  
A ne sonjet dean, e voa sur a fidel,  
A so bet trahisset, ya, n'en deus quet pel.

Tud ar plac-man a so, eus e dud a locañ,  
Graç deo da brospéri, ebars er Brovidañ;  
Ma vuelfein hep-dale, an daou bried fidel,  
Ebars en o jardin, fleuriou caër o sevel.

Me meus choaset eur vestres, a so d'am fantasi,  
Pehini dre he guenet a so deut d'am charmi,  
Ganti mâ an alc'houeou eus a zor ma c'halon,  
Pehini or groa contant, on daou e pep féçon.

E bleo so allaouret, melen e zint frizet,  
E anal adorapl, evel pa ve musquet,  
E daouarn so melet gant ar glas hac ar guen,  
E bisach in graet, evel d'or berlesen.

E musellou so douç, douç evel ar mel pur,  
E anal adorapl, evel d'ar surnatur,  
E daou lagat a vrill, evel diou stereden,  
E gousouq a so caër, evel d'eur berlesen.

E mouez so ravissant, e speret angelic,  
A laca rivierou da zanzal manific.  
An oll dour a saillo, ar pesquet a lamo,  
Hac ar vartolodet, en ho lest a zanso.

Ma mestres a so caër evel ar bleu er spern guen;  
E diou chot a so ru evel da zion rosen;  
E c'hyenou so caër, quer bras ez int pintet,  
Dridal ra va c'halon, na demeus e guelet.

Dridal ra va c'halon, na demeus e guelet;  
Mar fel dec'h gout piou eo, TINIC e zeo hanvet;  
Balamour ma credan, on gant Doue inspiret;  
Nac evit e c'haret gant amitie barfet.

Me meus caret va mestres, hac e c'haro bepred,  
A me e c'hurunfe, ma ve din permetet,  
A me e c'hurunfe, ma ve din permetet,  
Quer caër e c'havan, evel an eol biniguët.

E mamm so quer charmant, nac ebars ar bed-man,  
Hi a garan certen, vel va mamm va hunan,  
Balamour ma è hi, e deus laquet er bed,  
Ur plac'hic yaouanc flamm, pini garan barfet.

Tinic a so quer coant, vel d'ar ros er bed-man,  
Hounes, a dra certen, a blich d'an dud yaouanc,  
Balamour de furnes, hac e santimant vad,  
N'en deus den er baros, vel dei quen agreabl.

O c'hoar demed a so eur vreg fur a prudent,  
O breur a so ivez eun den yaouanc vaillant,  
A tout o oll gueren so tud a liguez vad,  
Deut oll do imita, gant o exemplou mad.

Doue neus crouet gue, nac ebars er bed-man;  
Hac e ve florissant, pa ve deut ar mis-man,  
Calon an dud yaouanc, so ivez memes tra,  
Pa ve deut ar mis-man, a ve carguet a joa.

Pa m'en em c'ham a goste, o sonjal bars ar bed,  
Me glev ur voesic scler, a droubl a va speret,  
Ma teuis da sonjal, pe c'hlevis o cana,  
Voa un eostic, pe eur voenus, pe ma mestres Tina.

Assata va mestres, avanç a ram en oad,  
Bud a zo on amser, evit ober pep tra;  
Mar be contant Doue, ni allo assambles;  
Caer o devezo an dud, o trouc presegueres.

Goal Doue or c'hunduo, lec'h man e volontez  
Caer o devezo an dud, o trouc preseguez,  
Domach ar rel a reon, hini tam na vouelont,  
O trouc predi bemdeis, d'oc'h eme a deoc'h enont.

Ganti ma an alc'houe eus a zor va c'halon,  
Hi e deus hi digor, d'ar Verc'hes on itron,  
Hi e deus hi digor, d'ar Verc'hes on itron,  
Evit antren enni, en e fossession.

Mari a sant Joseph, voent o daou assambles,  
On devoe amitie, an eil evit eguiles,  
An dra-se a so caus, meus laquet em speret,  
Da gaout eur plac'hic, martese n'am c'har quet.

Quemen-man e c'haran, ne oufe den laret,  
Me garfe e douguen, e touez an ælet,  
A neuse pa vem ed, ebars er barados,  
An dud malicius, n'antrefin quet er gos.

Ma vezimp unisset, dre ar c'hraç a Zoue,  
Ne gafomp quet an amzer, hiroc'h evit eun de,  
Quen a vo deut an heur, da vont eus ar bed-man,  
Pa zeuint da vervel, mont a dare gantan.

Me bresantfe dei eur boquet, ma ve permetet din,  
Pehini e ma c'halon, ne gar den nemeti;  
Mæs ma na bermet quet, nac o queren ganoc'h,  
Adieu, er barados, quenavo a laran deoc'h.

An teot malicius so caus a gals a gol,  
Quement a so a nê, ma reont drouc ar bed-oll,  
Ma allen commandi, ebars er joastet,  
Gant ho amission, ne alfen den monet.

Mes gouzout eo ar ran, an amission so bras,  
Hennes so eur pec'hed, ha ne quitaît que c'hoas,  
E touez ar gueren, memeus ar re dosta,  
A ve an amission, a vechou ar goassa.

Ar zon-mâ zo savet, certen hac a zo guir,  
Zo savet d'eun den yaouanc, nal quet caout e zezir,  
Abalamour d'an dud, gant ho amission,  
So o ampech anean, nac ebars er c'hanton.

Marteze lod a c'hoarso, voar sujet ar son neve,  
C'hoarzint ar pez a garfont, ne rin quet a boan dime,  
Lod a ve o c'hoarsin, na voar o soutoni,  
A bed all oc'h ober goab, anezo e mon in.

Ma clefe ar Roue, quelou eus ar plac'h-se,  
A zeufe da Vriec, gantan eur messenger,  
Da brononç ar c'helou, enap ar plac'h yaouanq,  
Evit ma tisabuso, quement en deus dei c'hoant.

Adieu mezelour caër, adieu tremen amzer,  
Mont a ran da Ouengamp, en eun desert a gaer,

Me ma losq d'ar goal deot, vern quet piou a zisput,  
Ma c'halonic a ran, ar goal deot ra vo mud.

Mar fel dec'h gout ha clévetgant piou er son-man gret,  
Gant eur paysant yaouanc, eus a baros Briec,  
Gant eur paysant yaouanc, eus a draon ar bares,  
Hennes en deus-hi-savet, goude coan un nosves.

Mes ma zo unan bennac, bars er gompagnunes,  
Hac en defe desir da c'hout piou eo henes,  
Eo eur paysant yaouanc, eus a draon ar cresquer,  
Mar fel d'oc'h gout piou eo, c'houi c'halvo an eo PER.

Assa compagnunez, excus a c'houlennan,  
Ma n'en deo quet grêt ervad ar chanson-man;  
Me so eun den yaouanc, ne meus quet a speret,  
Difaiet ac'hanon, elec'h ma zon faiet.

Clevet a ret breman, cetu a nei ar fin,  
C'houi a lezo anei, me ne ouzoc'h quet quin,  
A nep a gavo dean, n'en dê quet doneat,  
A gomposo un all, hac a vo agreap.

## CHANSON AN DURZUNEL

Calz amzer a meus collet  
O furchal ar c'hoajou,  
Vit surpren eun durzunel  
Cousquet var ar bracou.  
Dêvet a meus va amors,  
A tennet e meus fall.  
Achapet an durzunel  
A nijet er c'hoad all (bis).

Dious an nos hac ar mitin,  
O clévet lapoucet  
O cana o fredonin,  
Da veq ar goue pignet.  
Na neus nicun anezo  
Hac a biq va c'halon,  
Evel mouez eun durzunel  
O vouela d'e mignon.

Hirvoudi a ra nos de  
Gant ar boan, ar glac'bar,  
Evel eun intanves paour  
Collet ganti e far.  
Na neus nicun anezo  
Hac a biq ma c'halon,  
Evel mouez an durzunel  
O vouela d'e mignon.

Petra, durzunel yaouanq,  
A dourmant da galon?  
• Collet a meus, emezi,  
Va fidella mignon.

Ma na zeu eur chasseour  
Da ober din mervel,  
Me varvo gant ar glac'har  
Da va mignon fidel.

• Neus na souten, na remet,  
Na consolation  
Capabl da zon da galmin  
Tourmanchou va c'halon.  
Trec'het oun gant ar glac'har,  
Mont a ran da vervel,  
Mes ne varvin quet contant,  
Ma na varvan fidel. •

Guelet a meus o vervel  
An durzunel yaouanq,  
Dizec'het eo ma c'halon  
Gant ar boan an tourmant.  
En e huanad diveza  
En deus c'hoas repetet  
• A va mignon fidel, •  
Ractal eo tremenet.

Mezelour scler a brillant  
Demeus ar fidelite,  
Ar model ar sincera  
Demeus ar garante.  
Nan, ne varvin quet contant  
Ma na varvan fidel,  
Birviquen na zizonjin  
Maro an durzunel.